

KIS-568 – An Istor, ar rezid hag al lavar

(GC da GE – 27 01 98)

Distreñ a ran war *Istor, brogarouriezh, broadelouriezh.*

“Il fait rêver, il enivre les peuples, leur engendre de faux souvenirs, exagère leurs réflexes, entretient leurs vieilles plaies, les tourmente dans leur repos, les conduit au délire des grandeurs ou à celui de la persécution, et rend les nations amères, superbes, insupportables et vaines.”

Eus petra ez eus anv ? Eus ar vroadelouriezh, kredapl. Naren ! eus

“le produit le plus dangereux que la chimie de l'intellect ait élaboré : l'Histoire” (Paul VALERY, *Regards sur le monde actuel* [1931], La Pléiade, 1960, t. II, p. 935).

Anzav a ran n'on ket a-du tamm ebet gant sellad VALERY war an Istor. Dreist-holl pa gendalc'h :

“L'Histoire justifie ce que l'on veut. Elle n'enseigne rigoureusement rien, car elle contient tout et donne des exemples de tout.

“Que de livres furent écrits qui se nommaient : « La Leçon de ceci, les Enseignements de cela !... » Rien de plus ridicule à lire après les événements qui ont suivi les événements que ces livres interprétaient dans le sens de l'avenir.

“Dans l'état actuel du monde, le danger de se laisser séduire à l'Histoire est plus grand que jamais il ne fut.”

(GE da GC – 02 02 98)

Paul VALERY en arroudoù a venegez a ziskouez un emzalc'h nac'hek e-keñver daou seurt Istor : da gentañ, skiant an Istor p'he zremener evit Gouezoniezh [ne gav ket din e ve istorour ebet o klask saveleñoù en darvoudoù istorel, ar voederion bolitikel eo a ebarzh enno ar savelegezh ; da skouer pa haere DE GAULLE : “la France vient du

fond des âges”, e terc'he Frañs evel ur retvez en Istor ; padal, war an hevelep tachenn e lavare VALERY : “Nous autres civilisations savons que nous sommes mortelles” ; d'an eil, an Istor mesiazal diwar ma venner dedalvezañ ar Bibl d'an darvoudoù [an Istor hervez ar Skritur n'eo ket Istor an istorourion ; se ne vir ket ouzh Yuzevion ha Kristenion a zeveizañ Istor an istorourion e termenoù ar Skritur evel kefleuniadur an diouganadenn-mañ-diouganadenn]. VALERY a ziorzh ken an istorouriezh savelek, ken an istorouriezh diouganek. Moarvat edo ivez en e spered an istorouriezh hegelian ha marksour, savlec'hiet etre Skiant ha Diougan ; MARX da skouer a ziougane ent vesiazal hag ent skiantel war un dro trec'h ar broleterion ha fin an istor. Ha ne gav ket dit eo yac'hus gwelout VALERY o nac'h atoriñ an darvoudoù da heul tud mennet koustet a gousto da lenn warno un disoc'h a saveleñoù pe ur c'hefleuniadur diouganoù ? Rak n'eus ket eno tezennoù akademek, graet ma vezont evit kantreizhañ kroaziadegoù, brezelioù santel, dispac'hioù renkadel, riezoù gouennel — merkomp eo e 1931 e skrive VALERY. Kement-se ned eo ket lavarout e tleomp skarzhañ pep damant d'an istor. Anv a ra an deologourion a “steuñv Doue”, hogen arabat e ve intent eno ur steuñv evel ar re a c'hourlaka ar gouarnamantoù. Mar kredomp e vez ar Spered o wezhiañ (ar Spered e ster an Aviel ha n'eo ket e ster HEGEL !), emañ aze hon engwezhiadur en Istor, o c'houzout avat ne vez furm an engwezhiadur-se nepred merket en a-raok, ez eo bepred kefleuniadur hon rezid ha nepred kemplegerezh d'ur savelegezh, d'un ideologiezh pe d'ur galloud. O c'houzout e vez mesket bepred e pep hini eus hon engwezhiadurioù rezid ha kemplegerezh, mard eus ur “steuñv Doue”, hag eñ n'eo ket e finvez hon digammañ diouzh pep kemplegerezh ? Ur skouer vat eus seurt rizh a engwezhiadurioù kemmesk e voe ESB. Hemañ a voe dre vras lec'h un dehentadur a rezid, a-dreuz da brantadoù ideologek diseurt, buhez gant tud ken diseurt all o davedennoù, mesk ha mesk kristenion, andoueaded, marksourion, brogarourion, hollveliourion, anveliourion, h.a., *kemplegerion* an holl anezho. Kaout a ra din ez eo aet ESB da get d'an deiz ma c'hallas an dehentadur a rezid dioueriñ pep kemplegerezh, en o zouez ar c'hemplegerezh da framm ESB e unan. Roll ESB a-benn ar fin e voe lakaat pep hini war hent an dieubiñ diouzh e gemplegerezh dibarek. Ur wech freuzet ESB en deus pep hini kendalc'het gant e hent, warnañ un derez a gemplegerezh dilerc'h, ennañ dreist holl al lañs d'ar rezid. Te, da skouer, zo chomet e'z kemplegerezh katolik, met lañs ar rezid en deus da zouget da emzieubiñ dioutañ.

En ul lizher eus ar 05 10 78 (*Emsav* 127, p. 59) e ra LL gant an termen *nac'helezh* oc'h emc'houlenn ha se eo a anv an *goull*. Keñveriañ a ra ESB ouzh al luskadoù kleizelour, ouzh J.- P. LE DANTEC pergen. Hemañ en doa kempleget d'ur varksouriezh “wellaet”, ni d'ur vroadelouriezh tangleuziet gant ar varksouriezh tangleuziet d'he zro gant ar gristeniezh, lusket ma oamp holl gant un *nac'h* a enebemp

ouzh an ideologiezh-mañ-ideologiezh hag hon douge, evit ur gwel, da vorc'hañ un ideologiezh all bep taol ; betek an deiz ma teuas splann dimp (da reoù ac'hanomp ac'hoel, evit da JPLD ha d'e getpared n'ouzon ket) n'eo ket un ideologiezh dibarek eo a vennemp disteurel, met ar c'hemplegañ e unan, ha pa ve ar c'hemplegañ d'ur vroad, d'ur reizhiad pe d'ur gravez. Se eo an emzalc'h *nac'hek* a gav din a lakae LL dindan an termen *nac'helezh*. Dav eo merkañ adarre ur skoilh enlenat d'al lavar, a'c'h eus meneget e'z lizher [p. 32 diaraok] : penaos lavarout an anlavaradus ? Amgevazas e vez an termenoù a arveromp er c'heñver-mañ, ken *goull*, ken *nac'helezh*, n'eo ket peogwir e ve un termen kevazasoc'h da gavout, n'eo ket peogwir ne c'hellomp mont di nemet dre an hent *nac'hek*, met peogwir e chom bepred e par an termenoù *nac'hek* ul lod a yaegezh ret a zleer diwall a gemer evit lavar an anlavaradus. Pa lakaan [p. 40 diaraok] ez eo an *angouzout*, an *andesaveladur* enlenat d'an hevelepted nidiadel (eleze d'ar rezid), ne hepkoran ket an touell e ve kemer an termenoù *angouzout*, *andesaveladur* evel araezioù gouzout ha desavelañ a rizh nevez. Teologourion 'zo (MARION da skouer) a skriv ar ger *Doue* en ur lakaat ur groaz warnañ evit diskouez ne c'haller mont dezhañ nemet dre an hent *nac'hek* ; arvar zo avat e virfe ar ger *Doue* e yaegezh e dierouez al lavarar hag ez afe ar ger argroziet d'un anv yaek nevez. Ne c'haller netra a-enep ar c'hemeradurioù bredel, kefredel, trabedel, h.a. a vez lakaet war ar gerioù *nac'helezh*, *goull*, *andesaveladur*, *Doue*, *rezid*, h.a. ; degas a c'haller bepred termenoù all, hini ne vo kevazasoc'h, pep hini zo evel un arhent, o kas pelloc'h hep aroueziiñ netra, resisoc'h : dibourc'het diouzh pep arc'hwel aroueziiñ. Ur mod devezout zo aze, disheñvel diouzh devezout klasel ar brederouriezh a zo argerzhañ dre an treug nadiñ-aregañ : stadañ a ran ha diwar va stadadenn e tezean, ez anrean, h.a. ; amañ e stader un diouer nadiñ, en e geñver e paouez ar gerioù a vezañ arouezioù, an devezoù a vezañ poelloù. Ur prepoz eo na pourchas ket dimp an dro da vont pelloc'h egetañ.